

GWIR VRETONED

—•—
KAN



*Gwir Vretoned, tud a galon, var-zao!
Da gana gloar da Vreiz hor bro,
Ha da ziouall tenzor he bugale:
Ar yez, ar peoc'h, al liberte;
Var zao! var-zao!
Da gana ' bouez penn:
Breiz da virviken! Breiz da virviken!*

1

O va Breiz, gant da douriou brudet,
Da vor glaz ha da veneziou,
Da vrug ruz ha da lann alaouret,
Te zo koant dreist an holl vroiou!

2

N'ez eus ket, 'vel etouez hor c'herreg,
A dud' vat, seder ha nerzus ;
N'ez eus ket, 'vel en hor brezoneg,
Soniou drant, gwerziou dudius.

3

Hon tud koz, tud leal ha santel,
Start evel hon dero kalet,
A ouezas miret da Vreiz-Izel
He brud-vad, he nerz, he gened.

4

Bretoned, savomp hor c'halonou,
Ha touomp e talc'himp atao
Da vale var roudou hon tadou,
Keit ha ma 'z ay ar bed endro!